

Bremañ



Stourmerien
ar peoc'h
e Belgrad

Saotradur
e Menez Are

Niverenn 136 - miz Genver 1993 - 20 lur

Bloavezh mat deoc'h holl, lennerien gaezh !

Lizhiri

Mignoned ker,
Trugarekaat a reomp BREMAÑ da
vezañ embannet ar galv hon boa
savet e Skolaj Diwan Roparz Hemon
a-zivout donezoniñ d'hon levraoueg
levrioù, ha dreist-holl reoù vrezhonek.
Trugarez c'hoazh d'ar re o deus roet
deomp levrioù ha dielloù en deiziou-
mañ, hag emañ hon levraoueger oc'h
ober war o zro.

Siwazh evidomp, ez eus en em silet
un nebeud viou-koukoug el lizher, da
skouer e vefe ret lenn: "lorc'h" ha n'eo
ket "loc'h" (linenn 9), "tu" e-lec'h "to"
(l. 30), hag ar pezh a c'hellje bezañ
bet komprenet fall, "an ur serten oad",
ha n'eo ket "er serten stad" (l. 33-34).
Nann, n'omp ket o klask skrapat
madou an dud ha tennañ hon mad
eus o mizer hag int deuet kozh, met
kentoc'h ma c'hellfed lakaat da
dalvezout lennegezh Vreizh hag ar
ouiziegezh dre vras da'r remziadoù
da ren.

Re alies eo bet lakaat da dalvezout
talvoudegezh arc'hantel al levrioù
brezhonek hepken, peotramant o
zalvoudegezh evel kuriozite pe evel
dastumad. Dalc'homp soñj eus ar
reuz a zo bet en-dro da levraouegoù
beleien Dreger er bloavezhioù
tremenet, hag ar c'holl ma'z eo bet
evit gladañ pe hérezh ar vro, hag ar
preizherezh heugus hon eus bet tro
da welout, pep hini war zigarez pe
zigarez o tapout o lod eus an teñzor.
Poent eo deomp stourm rak hon
techoù fall kent gwelout danvez
Breizh o louediñ e ti dastumerien
levrioù er vro-mañ pe en estrenvro.
Daoust ha mat eo evidomp Breizhiz e
vele ar vrasañ levraoueg vrezhonek
en Aberystwyth pe en Oslo?

Ar pezh o devez ar remziadoù
brezhonegerien yaouank ar muiañ a
ezhomm en tu-hont da c'houzout
komz, lenn ha skrivañ, eo gouzout
ar pezh a zo bet graet en hon yezh
hon raok. Met penaos ober ma ne
c'heller ket parañ e sellou war ar pezh
a zo bet moulet gwechall?

Distroomp neuze d'hon galv-ni.
N'emaomp ket e soñj digemer 10
skouerenn eus ar C'hatolikon, an dra-
se a vefe perzh ul levraoueg vroadel,
un ensavadur brezhon. Pezh
emaomp-ni o klask kentoc'h e vefe
dastumadoù kelaouennoù evel Hor
Yezh, Al Liamm, Ar Bed Keltiek, Barr-
Heol, Feiz ha Breizh, hag all... Danvez
evidomp da brederiañ, da aozañ
kentelioù diwano, ha setu holl.

Spi hon eus ne vo ket bet
treuzkomprenet hon galv. Seurt

bremañ 136 - miz Genver 1993

2

galvoù a vez boutin en diavaez d'ar
vuhez sevenadural. Ma ne gredit ket,
e c'hellfec'h mont da di un noter
bennak ha sellout war ar c'hontouer a
zo eno. Ha trugarez c'hoazh a
lavaromp deoc'h.

Gireg Konan
Skolaj Diwan Roparz Hemon,
Kergleuz, Ar Releg, 29200 Brest

Setu amañ da heul ul lizher bet kaset war
intrudu skolajidi 3de klas skolaj R. Hemon

Aotrou Kannad,
Kannati ar Pakistan,
18 stradaed Lord Byron,
75008 Pariz.

Aotrou ker,

Ur c'hlasad a zek skolajiad omp e
Skolaj Diwan Roparz Hemon, e-lec'h
ma vez komzet brezhoneg bemdez
peogwir ez eo yezh hor bro, Breizh.
Setu bremañ ouzhpenn ur bloavezh
eo aet kuit Jakez Bleuivenn eus
Plougerne evit ober tro ar bed o
reded. Gellat hon eus heuliañ e vaji
beteq ar Pakistan. Met abaoz miz
C'hwevrer 1992 ne resevomp keloù
ebet ken digantañ.

Hervez ar pezh hon eus gellat
gouzout gant Alain Dubos, bet kaset
d'ho pro gant Charly Chaker, e vefe
bet toullbac'het Jakez Bleuivenn
abalamour ma skrive e brezhoneg
e-keit ha ma oa o fouteañ bro, ar pezh
a oa digomprenus da archerien ho
pro. Tremenet eo bet da spier ganto.
Skrivañ a reomp deoc'h evit kelaouiñ
ac'hanoc'h e vez komzet brezhoneg
gant ouzhpenn 500 000 den, ha
kelennet e vez e div skol-veur,
Roazhon ha Brest. Met hon pal a zo
dreist-holl pouezañ evit ma vefe
dieubet Jakez! Evit ma c'hello kas da
benn e huñvre: ober tro ar bed war e
dreid.

Sur omp e c'hellomp kontañ
warnoc'h, da gompren ar boan-
spered hon eus bet o chom keit-all
hep kaout keloù digant Jakez, ha da
sikour ma c'hellit da lakaat dieubiñ
anezhañ. A wir galon ganeoc'h.

Trede klas
Skolaj Diwan Roparz Hemon.

Setu amañ kevret ur chekenn a 250
evit ur c'houmanant bloaz da
vBremañ.

Lennet am eus ho poa ezhomm
skoazell a-benn gwellat stumm ar
gelaouenn, setu da betra e c'hell
servijout an tamm arc'hant ouzhpenn
a gasan deoc'h.
Daoust din lenn pep miz ar

gelaouenn. Ha da vezañ kenlabouret
zoken. Ne oan morse bet
koumanantet, diegi eus ma ferzh,
digizarez evel just.

Gant ma gwellañ hetoù da Skipailh
Bremañ evit ar Bloaz o tont.

Alan Martel (Paris)

Emañ DIWAN o klask skolaerien-erlerc'hidi.

Ret eo dezho kaout ul live brezhoneg
dereat. Kasit ur CV hag ul lizher kinnig.

Klask 'zo war-lerc'h ur sekretour(ez)-
maketenner(ez), divyezhek, gant ul live
brezhoneg komzet, skrivet ha lennet uhe-
tre. Ur mailh war ar PAO ez eus ezhomm
bezañ ivez. Post-labour e bro-Vrest. Ur CV
hag ul lizher-kinnig zo da vezañ kaset da :

DIWAN
BP 22 29870 Lanniliz

Mignoned ker,

Setu amañ va adkoumanant ha tro
am eus d'ho trugarakaat evit al labour
bet sevenet ganeoc'h. Bravoc'h-
bravañ, dedennusoc'h-dedennusañ,
spletusoc'h-spletusañ, kalvezeloc'h-
kalvezelañ ar gelaouenn. N'ho po
nemet kenderc'hel da vont war-raok,
ken wir all ez eo un ezhomm
evidomp-ni kaout seurt benve-
kelaouiñ en hor yezh.


Un draig hepken, o vezañ m'eo bet
va amzer evel evit pep hini
ac'hanomp moarvat. Ma fellfe
Hegareg dirouestañ kudenn kaout
Gundestrup, hag e vefe re hir d'
respont d'eo lennad dre ar munud
ledan all eo tachenn ar sevenadur
e c'hellfe avat gant ar brasañ gou-
lenn pennadoù ar gelaouenn.

OGAM celticomp pe levrioù ha
pennadoù-skrid Christian, J.
Guyonvarc'h, Françoise Le Roux pe
re Georges Dumézil ha ledanoc'h-
ledanañ war an hent-se, Mircea
Eliade a vo kavet e meur a
embannadur, e galleg pe saozneg
gwir eo. Aze marteze, ha pell diouzh
pep kealladurezh a-vremañ, e kavo
ho kenskriver pezh a oar endeo, da
larout eo n'edo ket re bell indez
diouzh Europa... Gwechall-gozh.

Spi 'm eus e teout a-benn da
embann Bremañ bep pemzektez a-
benn nebeut.
Gwellañ gourc'hemennoù, ha
bloavezh mat.

Yann Duchet (Redon)

Yougoslavia



Stourmerien ar peoc'h Kelaouiñ ha liammañ tud ar vro

Deuet e oa Indira Kazelecevic, stourmer eus kreizenn
enebprezel Belgrad, da Vreizh d'ar 4 a viz Kerzu, da
zisplegañ d'an dud savboent Stourmerien ar Peoc'h e
Yougoslavia kent, a soñj dezho eo eus an diabarzh e
teulo diskoulm enkadenn ar vro.

Binvioù

Gant nebeut a dra e ra kreizenn
enebprezel Belgrad. Gant ar spi da
zistreiñ gant ardivinkoù e oa deuet I.
Kazelecevic ivez. Luc'heñterez,
responter pellgomz, skoazell
danvezel-kenañ a zo ezhomm du-se,
rak gant nebeut-tre a binvioù e labour
ar greizenn. Hag e teu a-benn
c'hoazh da seveniñ ul labour
pouezus : kelaouiñ ha liammañ tud ar
vro, dre ar media, oberiant-kenañ
c'hoazh, ha lakaat ur vouezh ha n'eo
ket hini pennoù ar brezel, da vezañ
klevet.

Mirout ouzh brezel Bosnia d'en em
ledañ da Kosovo pe Makedonia, hag
evit kement-se, lakaat brezel Bosnia
da baouez, setu pal I. Kazelecevic hag
he mignoned. Kaout ar peoc'h a-raok
Nedeleg e oa o huñvre. A-raok fin ar
goañv e vije mat ivez, gant ar
yenijenn a zo krog da lazhañ ar re
wanañ, ha peurechuiñ ar "glanadur"
serbat ■

Hegareg



Indira KAZELECEVIC

Anep d'an dud a-du gant un
dagadenn soudardel e
Yougoslavia kent, ar re-se
niverusoc'h-niverusañ en Europa er
mare-mañ, e sav stourmerien
kreizenn enebprezel Belgrad :
"sammañ brezel ouzhpenn d'ar
brezel ne vefe ken" emezo. "Estreget
brezalgarourien 'zo em bro" a
larout eo n'edo ket re bell indez
diouzh Europa... Gwechall-gozh.
Spi 'm eus e teout a-benn da
embann Bremañ bep pemzektez a-
benn nebeut.
Gwellañ gourc'hemennoù, ha
bloavezh mat.

traoù, hervez I. Kazelecevic, ha
diskouezet ar pep heugusañ eus an
darvoudoù hepken. Peoc'hgarourien
Yougoslavia o dije meizet ne vo ket
diskoulmet ar gudenn hep ar pobloù
a ya d'ober Yougoslavia kent.
Goulenn a reont digant Europiz o
skoazell, ouzh an holl intrudu politikel
evit ar peoc'h, broadel pe
etrebroadel, ouzh an holl re a
c'houlenn digant o gouarnamantoù
paouez da gas armoù, ouzh an holl
re a stourm evit brudañ ar peoc'h hag
ar peoc'hgarourien e Yougoslavia
kent.

MANIFESTADEG

SADORN 30 a viz GENVER

SANT BRIEG

Deuit holl da Sant Brieg d'ar
Sadorn 30 a viz Genver 1993 da
vanifestiñ a-gvret gant Stourm
ar Brezhoneg evit diskouez n'oc'h
ket evit asantiñ da waskerezh hor
yezh gant France 3 Ouest ; evit
goulenn krouidigezh ur gwir
ganol skinwel e brezhoneg.

Emgav da 15 eur 30, Tachenn
Veurzh (Champ de Mars)

bremañ 136 - miz Genver 1993

3

An dismegañs hag an aon

Nac'hañ sinañ Karta Europa ar yezhoù rannvro pe bihanniver a laka ar Riez c'hall da ziskouez splann he ideologiezh hollvelek, par da hini Stalin pe re all a seurt gantañ aet da anaon n'eus ket pell zo. Gant ar Roue Frañsez ar c'hentañ e oa bet lakaet dre nerzh trefodach Enez-Frañs da yezh ofisiel er broioù aloubet gantañ gant skrid-embann Villier-Cotterêts e 1539. Ul lezenn nevez zo bet lakaet war ar starn bremañ gant hor gouarnerien evit nac'hañ implij ar yezhoù bihanniver. Ger-stur ar Stad-C'hall : "gnt ar pezh a lavaran hogan na rit ket ar pezh emañ oc'h ober du-mañ". -Anat eo dismegañs ha distiz an "Ardivink jakobin" ouzh e rannvroioù divyezhek. -Anat eo ne zalc'h ket ar Strollad Sokialour Gall ha Fañch Mitt d'o fromesaou a-rack dilennadegoù '81. -Anat eo, en diwezh, an aon da goll an disterañ galloud e-keñver ar rannvroioù, pa c'hallent lavaret groñs traoù 'zo, an aon da vevañ rediet da vont gant un hent dianav betek-henn : hini ar spred-digor hag an doujañs. En abeg da gement-mañ ez embann ar c'hevredad "Heimetsproch un Tradition" (Yezh hon tadoù hag hengoun) (3000 ezel) ez eus droug bras en e izili. Gervel a ra ar c'hevredad holl dilenni di bro-Elzas ha re ar pobloù minorelaet all da c'houlenn start e vefe doujet ouzh gwirioù diazez ar geodedourien ■ Kevredad Heimetsproch un Tradition ar c'hadoriad H. Scherb (Bro Elzas)

Breujoù Europa ebarzhed ar yezhoù rannvroel er politikerezh sevenadurel

Gant kengor ar Sevenadur, ar Yaouankiz, an Deskadurezh hag ar Binvioù Kelaouiñ a Breujoù Europa ez eo bet ebarzhed ar yezhoù "rannvroel pe minorelezhel" en e zanevell a-zivout "oberezhed ar Gummniezh en dachenn sevenadurel". Kinniget e oa bet an ebarzhed gant kannaded an ALE, Canararro ha Max Simeoni, ha degemeret e bodadeg ar C'hengor d'ar 26 a viz Du. Pal ar mennad eo "talvoudekaat ha difenn ar yezhoù, re ar bihanniveroù dreist-holl". En ur mennad all degemeret ivez e lavarer he deus ezhomm Unaniezh Europa "diskouez ha brudañ hiniennalezh sevenadurel

Europa evel kenhollad... liesseurtiezh sevenadurel Europa ar broadoù, ar rannvroioù, hag ar bihanniveroù ■

Ur statud a yezh ofisiel evit ar brezhoneg e Breizh Da heul emvod meur ar C'Huzul-Rannvro a oa bet dalc'het e Roazhon d'ar 16 ha d'ar 17 a viz Du 1992, izili ar C'henurzhieriezh evit ar brezhoneg yezh ofisiel a oa bodet e Rostrenn d'an 21 a viz Du. E-kerz emvod meur ar C'Huzul-Rannvro e oa bet votet daou vennad. Laouen int bet o walet e c'houlenn ar C'Huzul-Rannvro digant ar gouarnamant sinañ ar Garta evit ar yezhoù-rannvro pe bihanniver. En eil mennad e tisklar ar C'huzul eo mat dezhañ ma talcho ar brezhoneg da vevañ, goullenn a ra digant ar Stad e vefe stummet a-zoare mistri-skol brezhoneg hag e vefe roet e lec'h d'ar brezhoneg en Deskadurezh. Un dra vat eo d'ar C'Huzul-Rannvro bezañ graet kement-mañ. Siwazh, da betra e servijo ar mennadoù-mañ, pa ouier ez eus bet diskliet gant meur a vinnistr ne oa ket ar Frañs evit sinañ seurt emglev etrevroadel a yafe enep d'ar voneizh, ha pa ouier ivez e nach ar gouarnamant e vefe votet ul lezenn evit ar yezhoù-rannvro kinniget gant kannaded sokialour ?!! An Ao. Dollo ne gred ket ken komz deus e zanvez-lezenn... Gant ar c'hevredigezhioù bodet er c'henurzhieriezh e oa bet kinniget d'ar Rannvro embann un disklieniadur a yae kalz pelloc'h evit ober goullenoù ouzh ar Stad. Soñjal a ra d'ar c'henurzhieriezh eo ret d'ar guzulierien-rannvro ober o labour : difenn ar Vretoned hag o interestoù - amañ o interestoù yezhel ha sevenadurel- hag evit kement-se kavout ur statud a yezh ofisiel evit ar brezhoneg e Breizh, diwar skour pennadurezhioù an holl rannvroioù en Europa ma vez komzet ur yezh bihanniver enno ■

GWIRIOU AR YEZHOU
Bodadeg e Pondivi
d'ar Sadorn 16 e viz Genver
da Seur, digor d'an holl.
KUZUL BREIZHAZ DA C'HORTOZ

Karta ar yezhoù rannvroel studiet pizh




Pierre BEREGOVY

Hervez ur respont graet gant Beregovoy d'an 2 a viz Kerzu, da Claude Barate, kannad ar Norzhkatalonia, e fell d'ar Pennministr "kemer amzer da brederiañ kent sinañ marteze" Karta Europat ar Yezhoù Rannvroel. E-pad an amzer-se emañ o vont er c'houlenn digant "an hevelestradurezhioù studiañ pizh, difradurioù ar Garta" evit "muzulia mat pe ziferadurioù a zo degemeret ha pere ne glotont ket gant reolennoù a dalv hiziv". Ar gouarnamant, a skriv ar pennañezhañ, a ray e soñj hervez disoc'h al labour-se. N'hall ket ar Frañs, eme ar Pennministr, sinañ re vuan, peogwir "n'eus ket eus ar Garta ur skrid pennañnoù dre-vras hepken, rak engouestladurioù rekis ha resis zo enni, ha sevel a ra diwarno kudennoù lezenn hag arc'hant". Menegiñ a ra Beregovoy embann Villiers-Cotterets e 1539, ha reolennoeug al labour "a zifenn ober gant ne veim pe c'herien estren". Displegañ a ra ivez ar ministr "en deus pletet ar gouarnamant abaoe bloavezhioù gant diorroadur ar yezhoù rannvroel" hag e vez graet "strivoù bras" gant skinwel France 3 ha skingomz Radio-France.

ur raktres evit ar yezhoù rannvroel

Tostaat a ra mare ar votadegoù. N'eus ket kaoz en dro-mañ eus danvez lezenn Dollo ken : emañ o vevinañ e bered promesaou 1981, ha den e ti ar PS ne ra van ken da grediñ e tassaroc'ho un delz.



Jack LANG : ur raktres nevez evit kelenn ar yezhoù

Evit o c'hoariell d'ar Vretoned kar-vezh emañ Jack Lang o paouez skañval ul lizher d'ar Rektored da c'houlenn diganto sevel ur raktres evit kelenn ar yezhoù. Abaoe 1981 ne oa ket bet kavet amzer d'e sevel. Anavezout a ra ar ministr pegen pouezus e oa kelc'hizher Savary, e 1982, ha lavarout a ra eo ret respont d'an ezhomm diskliet fraezh gant ar skoldi hag ar familhoù, pe e ve evit kregiñ gant studi ar yezhoù, pe evit kaout un deskadurezh divyezhek.

17 a viz Kerzu

A-benn ar 17 a viz Kerzu, hervez ar ministr, an hini e ranko ar rektored kemenn pegement e vint aet war-raok. Kenderc'hel a reer, eme ar ministr, gant an hent digoret gant kelc'hizher Savary, poent eo mont pelloc'h bremañ. E-elfenn a vo da gemer e kont : ar goullenn a-berzh ar familhoù, stummadur ar skolaerien, ar sirusted e kendalc'h ar studioù ha kinnig

enteuziñ ar skolioù dizalc'h, sevel kuzulioù evit ar yezh hag ar sevenadur, ar c'henemglev etre melestradurezhioù an Deskadurezh hag ar Sevenadur.

War-Raok

Gwelout a ra tud an APEEB ez eus un arakadenn gant anaoudegezh ar c'hlasoù divyezhek hag o zalvoudegezh, 10 vloaz goude ma'z int bet savet en Deskadurezh-stad. Lod all a soñj n'eus emañ nemet ul lizher, hep tamm galloud e-skoaz al lezennoù, dekredoù pe zoken kelc'hizhiri ministreriezh (evel kelc'hizher Savary e 1982 da skwer). Hag al lizherig-se ne chomo mui kalz tra eus ar c'hinnigoù zo ennañ goude dilennadeg miz Meurzh, pa zeuy an tu dehou e penn an Deskadurezh e Paris. Disammet e vo neuze ar Rektored hag o Ensellerien diouzh ul labour n'o devoa ket goullennet kaout ouzhpenn.

M.K.

EXPOLANGUES 20-24 a viz GENVER

Dalc'het 'vo "Expolangues" evel bep bloaz e dor Versailles eus an 20 betek ar 24 a viz Genver 1993. Stad a zo ennomp o kemenn deoc'h e vo ur Stand Brezhoneg da gefiver an darvoud-mañ. Paet eo gant Skol-Uhel Ar Vro ha skoazellet eo ivez gant Kuzul-Meur Aodou-An-Arvor. Kaset eo da benn gant un nebeud kevredigezhioù (Ti ar Brezhoneg, K.B.B.B., Entente Culturelle Bretonne, Radio Bro, Diwan Paris) a ziskouezo stad a-vremañ ar brezhoneg en deskadurezh, er media, en embann, hag a ginnigo ivez traoù nevez-flamm.

Tu 'vo da gomz a-hed ar sizhunvezh gant tud eus ar gelaouenn "Bremañ", Kinniget 'vo "Hatoupt", c'hoari nevez an ti-embann "Keit Vimp Bev". Diskouezet 'vo choarioù video e brezhoneg, hag ivez ul lojisiel nevez evit deskiñ lenn e brezhoneg produet gant an AFL (Association Française pour la lecture).

Gwerzhed 'vo d'ar Sadorn 23 a viz Genver Geriadur Meur divyezhek ar brezhoneg a-vremañ, bet embannet nevez-zo gant "Skol-Vreizh" (90 000 pennger en holl, kement hag ar Robert evit al lodenn Brezhoneg-Galleg ha doare al Larousse evit al lodenn Galleg-Brezhoneg). An Aotrou kelenner Favereau a vo war an dachenn evit sinañ e obereñ.

Diskouezet 'vo ur gelaouenn nevez evit ar vugale, Moutig hec'h anv embannet gant Skol an Emsav Kerne-Izel gant skoazell Skol-Uhel Ar Vro. Metro : Dor Versailles/Bus : 39,49, PC. Adalek ar Mercher 20 betek ar Sul 24 a viz Genver. Degemer mat vo graet deoc'h en hor stal !

Ti Ar Brezhoneg

Ul lezenn evit ar yezh war wel

Emañ an Itron Tasca, sekretourez-stad, evit ar frankofoni hag an darempredoù sevenadurel diavaez, o vodañ un 50 a dud veur evit klavout o alioù war he raktres-lezenn a-zivout "implij ar galleg e Bro-C'hall".

Abep seurt gallegerien a oa bet pedet : Régis Debray, bet kuzulier prezidant ar Republik, Raymond Devos, ar farouell, Claude Hagège, ar yezhour, Jacqueline de Romilly, an hellenougerez, Michel Serres, ar prederour, Umberto Eco, ar romantour italian, Henri Lopes, bet kentañ ministr Bro-Gongo, Pham Khac Lam, rener skinwel Viet-Nam. Kenemglev zo bet gant an holl dud pedet evit lavarout ez eus ezhomm eus lezennoù a-zivout ar yezh, hervez un hengoun ken kozh ha 1539, dezho da bal bremañ diwall na vefe harluet ar galleg eus tachennoù a zo bet aloubet gant ar saozneg-amerikanez. Michel Serres en deus embannet bout a-du gant "kement lezenn a d'wall ar re wan diouzh ar re greñv. Hiziv, en hon bro, emañ ar re binvidik hag ar re a ren o komz saozneg-amerikanez; ar galleg a chom yezh ar re baour hag ar re ne renont ket, en o z e vin-me atav".

Al lezenn dazont

Raktres-lezenn an Itron Tasca zo savet evit difenn ur yezh "argaset" er C'hwech'horn hag evit "diskouez d'ar c'hallegerien estren ez omp tomm ouzh ar galleg". Pal al lezenn eta a vo lemel e-barzh ar peder zachennad-mañ : ar skiantoù, ar c'henwerzh, ar selled-hakleved, hag an aozadurioù etrevroadel. A-benn miz Genver e lavaro ar C'huzul-Stad hag-ñ emañ skrid an danvez-lezenn hervez ar Vonreizh. Peogwir ne c'hello ar Gambro emvodañ nemet goude an dilennadeg (21 ha 28 a viz Meurzh), ha kentoc'h eget gortoz keit-all ha leuskel ar gouarnamant da-zont da bledin gant he skrid, emañ an Itron Tasca o vont da c'houlenn digant ar gouarnamant gervel ar gannaded d'ur vodadeg dreistordinal, e miz C'hwevrer moarvat, evit votiñ al lezenn nevez.

Lezenn 1975

Ne vez ket laketa lezenn 1975 da dalvezout nemeur. Koulskoude, hervez ez omp rediet d'ober gant ar galleg e-barzh ar bruderezh hag ar skriteleoù brezhonek evit ar gouelloù, festoù-noz, hag all, evel ma'z eo difennet ar c'hontradoù-labour gant reolennaoueg al labour. Anavezet eo al lezenn gant hon c'hannaded avat, hag evezhiañ a c'hellimp ouzh o emzalc'h pa zeulo ar skrid nevez dirak ar Gambro. Evel ma oa bet votet lezenn 1975 ganto a-unvouezh gwechall, n'eus bet hini ebet anezho e 1992 oc'h enebiañ, gant e votadenn, ouzh mennad daskemmañ ar Vonreizh a lak ar galleg da yezh ofisiel nemet. Marteze e c'houlenno hon diennid e 1993 ivez ur vodadeg dreistordinal evit votiñ ul lezenn evit yezhoù gwasket ar C'hwech'horn. Biskoazh kemend-all.

Taolioù-pluenn

Un danvez-lezenn a zo war ar stern evit "préservier de certaines dérives ce patrimoine fondamental qu'est la langue nationale" !

Ger ebet er c'helaouennoù diwar-benn ar raktres lezenn-mañ hervez ar pezh 'm eus gallet lenn, nemet ur pennad dek linenn e Ouest-France an 12-13/12/92, hag unan hiroc'hik e Le Monde an 10/12. Met lakomp ar

gaoz war "dérives" an dud veur-se. Tro 'm eus bet da glevet, d'an 8 a viz Kerzu 92, abadenn "Radio Com" war "France-Inter" etre 8e45 ha 9eur diouzh ar mintin. Pedet e oa aze Catherine Tasca evit rentañ kont eus

he raktres. Ul lezenn a vo kinniget d'an deputeed en nevez-amzer pe e-pad un dalc'h dreist-ordinal eus ar Parlamant, bodet a-ratozh-kaer. Selu daou zavoudig kontet e-pad an abadenn a lako a'hanoc'h da dafva un tamm ar meuz a vez prietret deomp e-kuzh, gwelloc'h eget displegadennoù hir. Animatour an abadenn en deus kontet un istorig c'hoarvezet dezhañ : "gwelet em boa e Carpentras ur stal dilhad gant ar ger "sweaterie" (distaget "sweleur" gantañ) war he fanel. Ur c'hoant bras a oa deuet din da gemer ur pavez evit diskar gwerenn ar stal". Catherine Tasca he deus kontet diouzh he zu ar pezh a oa c'hoarvezet da Claude Hagège, brudet evit difenn ivez yezhoù bihan Frans, e-pad ar c'hendiviz. Rebechet o deus ar berzhidi all dezhañ gant genoù feuls bezet skrivet un nebeud pennadoù e saozneg e-barzh kelc'hgelaouennoù skiantel. O prientiñ "nozvezhoù stink" a-zoare deomp emaint ■

P.Lanoë



"ur c'hoant bras a oa deuet din da gemer ur pavez..."

Kuzul Sevenadurel Breizh en Oriant

Kinnigoù war yezh ha sevenadur Breizh evit an XIvet steuñv

D'ar 5 a viz Kerzu e oa en em vodet izili ar C'huzul en Oriant evit prientiñ kinnigoù evit an 11vet steuñv Stad-Rannvro, e-keñver yezhoù ha sevenadur Breizh. N'eo ket dre zegouezh e oa bet dibabet an Oriant. Gant Gwengamp ez eo ar gêr vras a ro ar muiañ e blas d'hor yezh. Dres d'an deiz-se e oa ivez digonidigezh ofisiel mediaoueg nevez-flamm-flimin an Oriant : divyezhek eo an holl bannellerezh enni, evel en holl azevadurioù nevez. Dre vodadeg e oa bet labourer gant izili ar c'huzul. A-du emañ an holl war ar pezh a vefe d'ober ha goullennou resis-tre a zo bet graet. D'an dilennid eo bremañ da lakaat o oberoù da gilañ gant o c'homzoù ■

Maodez Kombod



Degemeret e oa bet izili ar C'huzul en Oriant gant ur banne-a-enor kinniget gant an Ao. Maer (a-gleiz da zehou) : Pierre Le TREUT (isprezidant ar Rannvro) Lena LOUARN (KSB) Per DENEZ (Prezidant ar C'huzul) J.Yves Le DRIAN (maer an Oriant)

Ur prefed a gomz brezhoneg !

Prefed kozh Penn-ar-Bed, an Aotrou Saborin, en deus souezhet meur a hini a-raok mont kuit eus Breizh, anvet ma oa bet e lec'h gant ar gouarnamant. D'ar 17 a viz Du 1992 en doa respontet d'ur goullenn dre skrid graet gant Jean-Yves Cozan a-zivout ar brezhoneg, o kregiñ e respont en hor yezh. Peogwir ez eo ar galleg yezh ofisiel nemet ar Republik unvan ha disrannus, e c'heller en em c'houlenn hag er Republik gall emaoomp c'hoazh...

Unan all ne ra ket...

Arabat deoc'h ober biloù, tudoù. Er Republik gall emaoomp c'hoazh ha difennet-mat eo he yezh gant Prefed Aodoù-an-Arvor. Goullennet en deus hemañ digant ur gevredigezh nevez eus Bro-Dreger treiñ hec'h anv brezhonek, peogwir e oa skrivet "he diskleriadur en ur yezh estren".

I.K.

Deskadurezh

Eurvezhoù-kelenn paeet gant ar c'huzul-rannvro

An eil bloavezh hevlene da Guzul-Rannvro Languadoc-Rosselló kemer perzh e krouidigezh unioù kelenn okitaneg pe gatalaneg e skolioù-stad pe brevez. 71e 1/2 okitaneg a vo paeet eta, ha 32 eurvezh katalaneg, pa ne oa nemet 12 warlene. En holl eo bet daougemetent an eurvezhoù ha kresk a vo moarvat a-benn bloaz adarre. "Betek 100 eurvezh katalanek, eme Etienne Amiel, rener gwazva ar sevenadurioù okitanek ha katalanek er C'huzul Rannvro, "ma ne vez ket kenlabour a-berzh ar Rektoriezh". An intrudu-se a ziskouez "pegen diwir eo arguzennoù pennou-bras ar Rektori da lavaront n'eus den o c'houlenn seurt kentelioù", emezañ c'hoazh.

BRUDEREZH

T-SHIRTOU

Daou Zoare :

"N'eo ket Breizh da Werzhañ !"

(gwer, ruz pe du)"

"Breizh lles liv"

(gant banniel Breizh liesliv)

A-bep seurt mentoù 'zo : 50 lur an tamm mui 15 lur evit ar frejoù-kas, (chekennoù war anv Robert Baxter) da c'houlenn digant :

Youc'hal, c/o Sked 9

straed Bois D'Amour 29200 Brest
Sac'hig : "Gwelloc'h vele merkañ war ar roched : "N'emañ ket Breizh da werzhañ !"

Ur sell all war Sant-Brieg ha sevenadur Breizh

Embannet eo bet n'eus ket pell zo war Bremañ ur pennad skrivet gant Mikael Korle. Ne gomzimp ket amañ eus an elfennoù "hiniennel" (*ne zedennont den ebet*) en e bennad, hogen kentoc'h eus plas sevenadur Breizh e Sant-Brieg.

Douost ma'z eus kalz a vrezhonegerien e Sant-Brieg, arabat ankounac'haat koulskoude ur wirionez kentañ : e Breizh-Uhel emañ Sant-Brieg, ar pezh a laka anezhi war ul live disheñvel ouzh ur geoded lec'hiet en tu all da linenn Ploucha-Gwened.

Ur wirionez all : douget eo ar sevenadur e Sant-Brieg gant un niver bras a gevredigezhioù ma glask an ti-kêr reiñ dezho hervezh e c'halloud azouñ ur mont-en-dro kevatal gant o fal.

En divezh e vez klasket, gant ur gwel politikel araokour, liammañ ar gennadoù liesseurt kenetrezo evit ghuout, da skouer, na savfe ghettoù disablant ouzh buhez ar strollder.

Ha gant ar sell-se ha dre ar pleustr-se e vez graet an traoù gant an ti-kêr e Sant-Brieg, evit afer sàlioù Oaled Abherve ha Gazibul Theatre peurgelket. N'emañ ket oc'h enebañ ar c'hevredigezhioù an eil ouzh eben, o klask sikour anezho da ziorren, evit mad an holl, ne lavaran ket.

Ne c'hellomp ket asantiñ da steuzidigezh ur strollad c'hoariva pa'z eus tu da gavout un disoc'h amsavus evit ur gevredigezh sevenadurel all, ha pa vefe houmañ breizhek.

Ankounac'haat an dra-se 'zo brieteakaat ez-divizul e vad hiniennel hep bezañ chalet gant mad an holl. Ret eo degas da soñj un nebeud fadoù.

Oaled Abherve zo ur gevredigezh sevenadurel vreizhek gouestlet dreist-holl d'ar c'helienn brezhoneg abaoe un dek vloaz bennak. Graet he deus ivez strivoù evit sevel diskouezadegoù ha kinnig prezegennoù.

Ar c'hinnig graet d'an Oaled gant an ti-kêr a laka e penn-kont ar wirionez-se p'emañ ar CAC (centre d'Action Culturelle) o paouez bezañ nevezet hag he rener kemmet, ha pa'z eo bet fiziet ennañ ar gefridi da charaññ e ober e-barzh an endro lec'hel ha

rannvroel, gant an etreweredoù talvoudus a c'hellfe sevel diwar-se.

Al lec'h nevez kinniget d'an Oaled a zo rannet etre 2 sal dereat (*ha brasoc'h eget an hini kozh : 104m2 e-lec'h 52*), nepell diouzh kreiz-kêr ha tost awalc'h ouzh skol Diwan. Gwellaet eo c'hoazh ar c'hinnig gant un arsavlec'h aes da zarempredif (ha digoust). Komzet eo bet ivez eus perzhioù danvezel all, e-giz ur panellañ divyezhek, azouñ denesadur evit an diskouezadegoù hag ar prezegennoù er Passerelle (CAC nevez), ken koulz hag adwelout priz ar feurm.

Diaes eo lavar goude-se, pe glask lakaat da grediñ e vez gwallgaset sevenadur Breizh e Sant-Brieg :

-Aesaet eo bet oberezh an Oaled evit ar c'hentelioù

-Tu zo dezho, a-hend-all, chom e kreiz-kêr (evit prezegennoù, diskouezadegoù), ar pezh a c'houlennont groñs gant gwir abeg. Ne c'hell ket Oaled Abherve, avat, unplac'hañ sevenadur Breizh e Sant-Brieg. Kevredigezhioù all zo oc'h ober war e zro gant jourdol abaoe pell.

Gwir eo o deus bet ar re-mañ a-viskoazh ar preder da labourat er c'harterioù, hag o deus pep hini e "di", e-barzh an 3 "MJC" hag ar c'hreizennoù Kevredigezhel (*menegiañ a c'heller SKV evit ar Sonerezh, Nevezadur evit ar C'haroll, Dudi-Skol An Emsav kreizenn dudiañ aotreet e Brezhoneg, ar Gouren...*) Empleget m'emañ e pep lec'h dre kêr, ez int deut da vezañ sevenadurel etrezek an holl dud e Sant-Brieg e lec'h ma vevont.

Kendeuzet eo skol Diwan er geoded abaoe pell ha tennañ ra he gounid deus ar pezh ne vez ket roet da skolioù all e Breizh, ha kement-mañ en desped d'ur "statud" a lez alies awalc'h an nor digor d'ar gwashañ strizh-kredennouriezh a-berzh ar re



Respont d'an taol-pluenn kaset gant M.Korle, Prezidant Oaled Abherve, Kreizenn Sevenadurel Sant-Brieg

ne welont e Diwan nemet ur skol prevez.

Fiziañs hon eus e vo kavet buan diskoulmoù evit gellout brasaat ar skol. A-benn nebeut e vo loc'het ur breutaerezh etre Steredenn hag an ti-kêr e-stern ur bodad labour a zo bet savet endeo. Enoues e vefe kinnig roll oberoù an ti-kêr evit he c'hevredigezhioù sevenadurel breizhek.

Sklaer eo koulskoude ne c'hell degemer e mod ebet e felle d'ur gealoniezh bennak lakaat ankounac'haat emañ ar sevenadur, breizhek en degouezh-mañ, d'an holl re a gar ha skign anezhañ evit an unan, e-giz ur benveg dizoleññ ha dieubiñ Mab-den. Na zio e mod ebet dont da vezañ ur benveg diroll etre daouarn ar re a arver anezhañ muic'h eget na zarbaront anezhañ. Ar sevenadur a rank bezañ ar pezh a laka an dud d'en em unvaniñ ha bezañ ket d'en em enebañ ! E-giz-se emañ, eveljust, evit an holl stourmoù : kinnig e vez pelloc'h gant ar bleinoù, c'hilask evit diskoulmoù padus, degemeret gant an niver brasañ, kerz ur youl dizehan da lakaat treuzenglevioù da darzhañ...

E-giz ma ne vije ket ar vuhez gevret, a-benn ar fin, nemet evit c'hilask evit un treuzenglev reizennet hag emluskel...

Jean-loup Lecocq, eil-maer e-karg ar sevenadur
Didier Le Buhann, kuzulier-kêr e Sant-Brieg

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdronoù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 130 lur
Skoazell adalek 160 lur

Klasoù divyezhek stad 10 000 skoliad a-benn 10 vloaz


Hiziv an deiz eo divalav a-walc'h plas ar yezh en Deskadurezh-Stad, a lavar dileuridi KTKB.

Stad an traoù

-war-dro 30 000 bugel a heuilh kentelioù er skolioù pe liseoù -war-dro 6 000 anezho a vez gant kentelioù er skolioù-mamm

Meur a abeg

Ken diaes e chom bepred kregin gant un hentenn brezhoneg : skouer e SARHAV (56) e 1991 e oa bet goulnnet ur c'hlas divyezhek hag e



E skoli-vamm ar "Faux Pont" e kreiz-kêr Roazhon

ha kentañ derez.

-ha 700 bugel nemetken a vez skoliataet an hentennoù divyezhek (amañ da heul emañ ar sifroù evit ar bloavezh-skol 1992-93 ; ur c'hresk a 18% a zo bet abaoe warlene).

Ne gresk ar sifroù-se, abaoe meur a vloavezh, nemet er c'hlasoù divyezhek. Pa soñjer en 379 000 skoliad a vez er skolioù publik hag en 258 000 a vez er skolioù prevez en Akademiezh Breizh (4 departamant) e weler n'eo ket gant ar skol etla e vo treuzdouget ar brezhoneg d'ar rummadoù nevez. Hag ar yezh eo diazez sevenadur Breizh hag he fersonolezh.

oa bet nac'het gant an Deskadurezh Stad. Hevelep tra zo c'hoarvezet e 1992 !

-alies e vank skolaerien divyezhek stummet ha barrek war ar vicher -dre vras ne dalvez ket kalz tra ar brezhoneg en arnodennoù ha konkourioù : en arvar emañ an arnodenn vrezhoneg er vachelouriezh, hag, a-hervez, ne vefe ket tu da skoldi ar c'hlasoù divyezhek implij ar brezhoneg evit tremen istor ha douaroniezh e "Brevet ar skolioù"

An holl enklaskoù a ziskouez koulskoude emañ a-du a-grenn pobl Vreizh gant deskadurezh ar brezhoneg. An hini diwezhañ a zo

EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG

Kazetenn evit deskiñ brezhoneg
B. P. 41 - 29870 Lanniliz
6 niverenn : 75 lur

sondaj T.M.O evit Kuzul Penn-ar-Bed ; 82.5% eus an dud a lavar e tlefe an neb a gar gallout deskiñ brezhoneg er skol.

Ur gwir politikerezh war ar yezh e Breizh

Sed ar pezh a c'houlenn an APEEB/KTKB eta ; ur politikerezh kaset da-benn a-gevret gant ar Stad, ar Rannvro, an departamatoù hag tud ar vugale. Ur raktres a-seurt a ranker kaout evit ma vefe c'hoazh eus kelenn ar yezh er XXI kantved.

Kinnig a reont eta ar pal a 10 000 skoliad e hentennoù divyezhek an Deskadurezh Stad a-benn 10 vloaz. Ma'z eo bet dibabet an hentenn-se eo abalamour ma'z eo an doare gwellañ da zeskñ brezhoneg, e vo un diazez evit astenn kelennadurezh ar yezh en eil derez da c'houde.

N'eo ket ur sord'henn ur seurt pal : an 10 000 skoliad-se ne vefe nemet 1.6% eus an niver a vugale a gaver er skolioù publik !

Gant ar pal-se ne c'houlennont ket archant ouzhpenn ; d'ar Stad emañ ar garg da ginnig deskadurezh d'ar vugale. Ha pa vefe e gallec, pe e brezhoneg eo ret mat dezho bezañ skoliataet !

-Stummadur ar skolaerien : aze emañ an dalc'h ! Goulenn a ra KTKB/APEEB e vefe stummet 400 skolaer divyezhek (25'400=10 000) dindan 10 vloaz, hag a vefe enskrivet ar pal-se er c'hoatrad-plan nevez etre ar Stad hag ar Rannvro.

Goulenn a ra KTKB ivez e vefe harpet ha brudet deskadurezh ar brezhoneg er vuhez foran gant an aozadurioù, da skouer : kentelioù er skingomz ha skinnel, ha bruderezh evit-se ivez ■

Armerzh

01/12/92 **Dale bras** 'zo gant diwan an had hag ar maiz e Penn-ar-Bed, en abeg d'ar glav, d'ar pri ha d'an dourvezioù er parkeier. Hadegoù kerch ha goot o deus gouzhaft ivez.

01/12/92 **Serret e vo ar stal-lazhañ** e Gantieg gant an embregerezh ar Gouessant. 107 implijad a vo dasparzhet war stalioù all ar strollad : e Breizh hag e kreiz Frañs.

01/12/92 **Divizet** eo bet gant ar strollad morbihanat Guyomarc'h kas e renerzh da Bariz, a-benn "aesaat e gresk etrevroadel" eme R. Gillain, rener.

02/12/92 **1,3%** a dud dilabour ouzhpenn e Breizh (4 departamant) e miz Here. 32% nebeutoc'h a ginnigoù-labour nevez gant an ANPE a zo bet ivez e-keñver miz Here 1991.

04/12/92 **Dileoridigezh** gar nevez porzh an Oriant. Evit dibourzhañ ar pesked gant kinn-samm e Keromann ez us bet dispignet 18 milion a lurioù gall. Manifestadegoù fauls-kenañ ez us bet gant simidi an Oriant da gefñver al lide-se. A daloù-dorn ha maen o deus 90 simiad en em gannet gant an archarian: simidi hanter-amzer dilabour ha skarzhet eus an ASEDEC war un dro int.

06/12/92 **Manifestadeg** e Sant-Yann-Brevele, ur vourc'h 2300 annezad dezhi, e-kichen Gwened, gant 3000 implijidi Unicopa hag o familhoù, a nach' bezañ kaset da Bondivi, 35 km a-le. "Manv ar gumun e vefe", eme ar maer R. Adels.

06/12/92 **Votet** ez us bet ur yalc'had ur milion a lurioù gall gant sindikad bro an Aire d'ar raktres a chanter sevel-bigi e Sant-Filiberzh. 126 implij a zo da vezañ krouet. Diviz komision an endro a zo gouzotet bremañ.

07/12/92 **Manifestadeg** produerien patatez e Brest ha Pondivi. 700 tonenn strawet e ruiou Pondivi, 2500 e Brest. Goulenn a ra ar brodrierien sikourioù d'ar vicher, hag en o zouez, ma vefe aotreet en-dro da werzhañ patatez da Irak. "Betek 40 000 tonenn e c'hellfe Irak. mont ar stokou nann gwerzhet", eme ar brodrierien.

08/12/92 **Skulzh** eo kambr Aodoù-an-Arvor ar c'henwerzh hag an industriezh da skoazellañ aerborzh Sant-Brieg, hanter goulo peurluviañ e girri-nij davet Pariz bemdez. "Marc'hadmatoc'h e vije deomp paeañ ar bilhed TGV hag ar deompagn ouzhpenn da bep beajour" eme F. Vaulson, rener ar CCI.

10/12/92 **Mank a besked**, prizioù o chom izel : enkadenn evit seizh porzh pesketa Bro-Gerne : betek 10% a zigresk war ar gwerzhioù e-keñver 1991, evit Konk-Kerne da skwer.

13/12/92 **Emvod** kuzul-aliñ an hentoù-houarn e su Breizh e Redon. "Kinnigoù a zo, a zo a-du an holl berzhidi ganto", eme ar prezidant J.R. Marsac, "nemet an SNCF ! Ma Kendalc'hfe an traoù e-giz-se e vijemp rediet da gemer intrudu all".

14/12/92 **65 implijad** kaset d'o leve gant Coopagri Breizh, a-benn prientiñ kamadur ar PAC, 30% a zigresk war ar gwerzhioù a zo rakjediet gant rannoù 'zo eus ar strollad kensourterezhoù, a oa 8 miliard a lurioù gall sifir e werzhioù e 1992. 3500 implijad e 4 departamant Breizh en e uzinoù e Groñvel, Landerne, Plouagad, Konk-Kerne, Montroulez, Hazhob.

14/12/92 **100 implijad** skarzhet eus ar Biscuiterie Nantaise, a-benn espern 50 milion a lurioù gall, ha digresket e vo ar goprou uhel gant ar memes pal (hini ar rener, G. Scherrer, a vo tennet ur bempvedenn dioutañ l). Kevezerezh bras 'zo o waskañ ar Choco BN hag al Lu bihan.



Labouradeg BN en arvar e Naoned

14/12/92 **Taolioù-rouedù** diwezhañ evit ar c'hregin sant-jakez a-raok nedelec : 10 lur ar chilogrammad eo c'hoazh priz al loen. D'an 18 a viz Genver e krogo en-dro ar pesketa.

16/12/92 **Telr stal-lazhañ** chatal eus Penn-ar-Bed, e Lesneven, Sant-Nouga ha Pontekroaz, rediet da serrin, disbosupl m'eo dezho doujañ da reolennoù Europa (war ar saotrañ) a-raok kalanna. 1300 tonennad a gig a vez tretet gant an teir uzin-se, a vo serret en abeg da vistrerazh al labour-douar gall, dale gantañ da gas an teuliadoù da Vrussels.

17/12/92 **7 km** a gourhent nevez tro-dro da Naoned, 42 km en holl evit ober tro ar gêr vras, hiroc'h eget periferik Pariz. Kalz aesoc'h a-se e vo d'ar Vretoned o tont eus Roazhon, Sant-Nazer pe Gwened tizhout Naoned bremañ : ne vo mui gouloù ru ebet war o hent.

17/12/92 **Prientez** e vez an divizoù war kotaioù-pesketa Europa e Brussels. Ne vez morsk pesketaet kement hag ar c'hota a zo lakaet da bep bro : "ur reizhad teorikel n'eo ken" eme D. Lhostis, prezidant sindikad pesketourien yaouank Breizh.

18/12/92 **Stalladur** statud nevez ar simidi er porzhioù. Ar feurioù dilabour uhelañ nevez a zo staliet e pep porzh, 30% er porzhioù-pesketañ 25% e Douarnenez ha Rosko, 20% e

Brest, Naoned ha Sant-Maloù (oc'h ober harz-labour e simidi c'hoazh), 15% e Konk-Kerne, An Oriant ha Sant-Nazer. 63 simiad hanter-amzer a zo aotreet da labourat d'ar muiañ tout e Naoned. ■

Sevenadur

01/12/92 **Embannidigezh** "Istor ar yec'hed e Breizh". Tri-ugent mezeg o deus kenlabouret da sevel al levr brav-kenañ a-zivout istor ar c'hienvedoù hag ar vezeien e Breizh (5 departamant).

01/12/92 **Embannidigezh** trade levrenn "Yezh ha lennegezh Breizh", gant F. Broudig, o renabliñ levrioù ha pennadoù-skrid e brezhoneg pe diwar-benn ar brezhoneg eus 1989 da 1990. Eus ar 688 pajenn bet skrivet gant M Madeg en ur ober an diaoù vloavezh-se, betek ar 769 studiadenn diwar-benn ar yezh, an hanter outo e galleg, bet embannet e-pad an hevelep prantad.

01/12/92 **Emvod meur** Bodadeg ar Sonerien, hanter-kant vloaz dezhi. Ouzhpenn 70 bagad zo ezel eus BAS e Breizh, mui bagadoù all e maez Breizh. Evit lidañ an degouezh e vo bet gouelioù meur e Breizh a-bezh 1993.

02/12/92 **Gant R. Kefelag**, eus uhelañ nevez a zo staliet ur pep porzh, 30% er porzhioù-pesketañ 25% e Douarnenez ha Rosko, 20% e

02/12/92 **Emvod meur** Bodadeg ar Sonerien, hanter-kant vloaz dezhi. Ouzhpenn 70 bagad zo ezel eus BAS e Breizh, mui bagadoù all e maez Breizh. Evit lidañ an degouezh e vo bet gouelioù meur e Breizh a-bezh 1993.

02/12/92 **Gant R. Kefelag**, eus uhelañ nevez a zo staliet ur pep porzh, 30% er porzhioù-pesketañ 25% e Douarnenez ha Rosko, 20% e

02/12/92 **Gant R. Kefelag**, eus uhelañ nevez a zo staliet ur pep porzh, 30% er porzhioù-pesketañ 25% e Douarnenez ha Rosko, 20% e

06/12/92 **Disoc'hoù** kenstrivadeg danevelloù an UPB, ael ar priz anezhañ gant C Querre, evit ar galleg, ha L Ar Bras, evit ar brezhoneg. Da vezañ embannet eo an holl danevelloù bet priziet gant an UPB.

08/12/92 **Eil gwerzh** taolennoù A Clouard, e Roazhon. Prenerien alaman a oa deuet ar wach-mañ, ha

betek 200 000 lur gall eo bet gwerzhet taolennoù 'zo, ha ne dalvezent ket 10 000 lur un nebeud devezhoù a-raok. Mignon P Serusier ha M Denis e oa A Clouard, hag awenet bras gant Breizh.

08/12/92 **Embannadur** eil levrenn Istor Breizh e bandennoù-treset gant R. Le Honzec ha R. Sacher. 18 000 skwerenn eus al levrenn gentañ, bet embannet bloaz 'zo, a zo bet gwerzhet c'hoazh, hag ar peder pempvedenn outo dre rakprenañ. Eus 830 da 1341 en em led tachenn an eil levrenn. E 1997 e teuo ar c'hwec'hvet levrenn, an hini diwezhañ.

09/12/92 **Emgav** daou c'hant kazelenner Frañs 3 e Roazhon, a-benn "prederiañ evit ar c'helaouiñ lec'hel, tostoc'h ouzh an dud" eme H. Bourges, rener ar chadenn skinwel.

09/12/92 **Embannidigezh** "Geriadur Breizh" gant R. Le Guyader. Breizh (pemp departamant) e 4000 pennad,



600 luc'hskeudenn, diwar-benn tud ha lec'hioù ar vro.

10/12/92 **Kengor** gouelioù folklorel Breizh a zo en em vodet e Pont-n-Abbad da dermeniñ deiziadur ar gouelioù evit ar bloaz o tont. Div abadenn ha tregont, bras pe vrasoc'h, eus miz Mae da Gwengolo, da laouennaat an douristed.

10/12/92 **Telr sonadeg** gant Gwerz, adsavet a-ratozh, a-benn produiñ ur

bladenn da zont er-maez e penn kentañ 1993. Ne vo mui Gwerz ur strollad padus, kentoc'h ur fram da embann bladennoù ha da skoazellañ sonerien Breizh.

11/12/92 **"Arabab** deomp kouezhañ e temtadurioù rannvroel", eme H. Bourges, rener Frañs Television, evit klozañ emgav e gazelennerien e Roazhon. E-kerz ar prederiadennoù en doa distaget ivez an Aotrou Rener

Lenit

al liamm

Skriavañ da AL LIAMM
16 straed des Fourès à Cheux
35400 - SAINT MALO -

Koumanant bloaz 150 lur
(studierien, tud dilabour
100 lur)

e oa "unan eus kefridoù" ar gazelennerien "skoazellañ liessegezh ar menozioù".

11/12/92 **Prizioù** ar sevel oberennoù arzel evit 1992 a zo bet roet gant Kuzul Breizh da H.Lelardoux, eus Roazhon, evit e abadenn-c'hoariva "Ubu Roi", J.C. Giovannelli, eus an Hen Bont, filmaozer, evit e "Requiem industriel", ha M.Lannuel, eus Brest, evit an abadenn "Rue de la Rade".

13/12/92 **"Arabab chom e-barzh hor mogerioù"** a lavar eil maer Sant-Maloù e-karg eus ar sevenadur, a-zivout gouel al levrioù-beaj hag hini ar bannoù-treset : div abadenn o deus graet berzh bras, hep bezañ bet dalc'het e-pad an harv.

13/12/92 **Emgav** gant ar c'hazelennoù evit filmaoeg Breizh, lec'hiet e Plerin, hag o virout ouzhpenn 3000 film. Klask a ra ar filmaoeg ul lec'h d'en em staliañ da vat.

13/12/92 **Emgav** kilvizienn-vor Breizh er Galveneg, gant an dilennidi, a-benn gouzout ma vije un dazont evit o micher, bet roet ul lañs nevez dezhi gant gouelioù bigi kozh, e-giz Brest 92.

14/12/92 **Embannadur** "Roll skrivagnerien ha yezhourien Breizh", gant L. Raoul. 400 pajenn, 1000 anv, embannadurioù Al Liamm.

14/12/92 **embannadur** "Ar Vikinged hag ar Geltaed" gant J. Renaud. 300 pajenn o tiskouez buhez martoloded skandinaviat etre an 8vet hag an 9vet kantved, hag o darampredoù gant ar Geltaed, en o lakaet ar Vretoned lec'h m'o deus ijaraet ar Vretoned d'en em unañ da stourm a-enep o enebourien. ■

Difennerien an endro

Ne vo saotret ket Menez Are gant dour hañvouez

Evit ar wech kentañ e oa bodet asambles difennerien an endro, labourerien-douar, chaseourien ha pesketaerien, mesk-ha-mesk. Savet 'voe follennou-klemm war ar prim o lavarout kement-mañ: Ni, tud Menez Are, a lavar emañ a-enep ar raktres skuilhañ hañvouez-moc'h e parrez ar Fouilhez. Degas a reomp d'ho soñj ez eo Menez Are kastell-dour an departamant ha dre-se, e kav deomp ez eo ret bras diwall al lannadoù dindan zouar. A-hend-all e kavomp gwelloc'h miret ar gorreadoù skuilhañ-se evit peizanted ar c'hornad. D'soust d'ar follennou bezañ sinet gant 401 dan diwar 450 o chom er barrez ha d'ar danuzul-kêr bezañ a-enep, n'eus netra da rebec'h d'ar raktres-se e-keñver lezenn.

Div wech re

Diaes eo douet da saverien-moc'h 'zo kavout a-walc'h a c'horreadoù war o farrezioù strishoc'h ma'z eo al lezennou war ar skuilhañ hañvouez hag ezhommo o deus eus douaroù dieub e lec'h all. Evit gwir ne vez ket sellet ken pizh-se pelec'h e vez skuilhet al loustoni ha degemer a ra douar Bro-Leon div wech ar pezh zo aotret. Met pa vo sellet tostoc'h ouzh an traoù diwar pouez reolennoù Europa e vo ret da bezanted Bro-Leon mont da skuilhañ da lec'h all. Riskl bras zo neuze e teufe tachennoù hanter aet da fraost, evel e Menez Are, da dalvezout da bod-laslec'h ha ne vo ket stlejerien gant tonennadoù met kirri-samm leun a hañvouez a vo gwelet o rodal er vro.

E-kêr an emvod en doa L. Lozac'h, kaner kan-ha-diskan, bet saver-pesked ha lakaet da brezidant ar gevredigezh, displeget penaos emañ ar rouedad-dour er Menez, penaos eo liammet ar mammennou ha penaos e talv teurel loustoni e forzh pelec'h e tu Kernev ar Menez kement ha saotrañ ar rouedad en e bezh.



"BRUMENNIÑ 'RA, a lavare an ozhac'h-meur, eus lein Are ; Argad!"

Leun-kouch e oa sal ar gouelioù e parrez ar Fouilhez gant ur c'hant hanter kant a dud d'ar gwener 13 a viz Du evit emvod kentañ an A.D.D.E.M.A. (Kevredigezh evit Difenn ha Diorren Endro Menez Are). Deuet e oant da ziskouez o nec'hamant hag o fulor en abeg d'ur raktres skuilhañ hañvouez-moc'h, kaset gant un atant-embregerezh eus Plouvoarn. Embannet e oa bet an enklask foran a ya da heul seurt raktresoù en ti-kêr.

Hogen ouzhpenn an dour zo. Ret eo gouzout ne vez ket miz hep klevout anv eus ur raktres bennak e parrez-mañ-parrez evit plijadur tud ar c'hêrioù bras, tachennoù-golf, tachennoù-chaseal prevez, ostalerioù ha lec'hioù diduil. Evit klask strolañ an dud hag a stourm en o c'horn a-enep ur raktres bennak, kendastum an holl nerzhioù evit bezañ efedusoc'h, eo bet savet ar gevredigezh nevez. An dud o deus displeget o nerzh dija o vont da stankañ an hent d'ar c'hazeg-tan ha d'ar 4x4 a zeu c'hoazh en desped d'al lezenn da c'hoari war dachennoù diwallet. Deut int a-benn da lakaat Kambur Kenwerzh Montroulez da gilañ gant e raktres "Mirdi ar mojennoù" e-kreiz ar Yeun Elz. Chaseourien ar Fouilhez a zo fuloret o welet ez eus bet prenet un lamm mat eus douaroù ar barrez gant un bennak da aozañ etadennoù chaseal evit bourc'hizien: homolc'h war varc'h a zo bet graet. Traoù diaes da c'houzañv e bro c'hoaveaz.

Ur "muzeo" war ar stern

Ar bodad-labour a zo bet savet gant ar gevredigezh: hini an dour, kudennoù ar raktresoù ar mare, un tregont bennak a dud ennañ, hini an endro ar vras (20 ezel) en devo da goustrañ gant mour a dra. Evel kudennoù ar c'hoadoù sapr o'h en em ledañ, o kas, ouzhpenn kement war an dremmvro, trenkder d'an douar ha d'an dour. Hini ar sevenadur (20 ezel), en ur vro m'emañ bev-mat c'hoazh ar brezhoneg, e-lec'h ma vez kavet stank kanerien ha sonerien, en devo da stourm a-enep ar raktresoù tounistelezh a-yoc'h. Ret eo gouzout n'eo ket bet dilezet raktres ar "Museo-parc des légendes" dont a ra en-dro gant ur gwiskamant nevez, skianteloc'h sañset, badezet "Centre d'interprétation des légendes". Gant un D evit Difenn hag unan all evit Diorren, n'eo ket an A.D.D.E.M.A. ur gevredigezh hag a nach pep tra. Klask a ra komz gant ar re o deus mennozhioù evit krouñ labour, en ur glask kempouezañ an traoù ha teurel evezh na vije ket graet forzh petra. Ur skouer vat eo an emglev etre tud "Eaux et Rivières de Bretagne" ha saverien ar raktres "Fulgor" e Brenniliz, ul labouradeg da sevel kezeg-tan nevez. A-du eo ar re-

mañ da zilezel an daouarc'heg o doa dibabet da dachenn-arnod, da gavout ul lec'h dereatoc'h.

Setu perak e oa deut niverus tud ar vro evit fest-noz kentañ an A.D.D.E.M.A. d'ar sadorn 19 a viz Kerzu er Fouilhez. Ne oa ket bet diaes kavout sonerien ha kanerien, an tri c'hard anezho izili eus ar gevredigezh. Gant an arc'hant dastumet e vo klasket mont war-raok: war ar stern ez eus ur gazellenn da vezañ skignet e Menez Are. Emvodou all a vo, bep tro en ur barrez dishañvel, an hini kentañ da zont e penn ar bloaz nevez, e Skrigneg ma vo pedet danvez-dilennidi ar bastell-vro. Ur wech c'hoazh e vo lakaet ar gaoc'h war an dour gant ar stanklec'h da vezañ savet er barrez-se, ar pezh a lakje 20 atant en arvar.

Pinvidigezh ar vro

Hor pinvidigezh kentañ eo an dour hag an douar n'int ket saotret c'hoazh. Ret e vo tennañ gounid anezho gant doareoù all da labourat an douar hep kontaminiñ an dour evit derc'hel ar gouerien ha mirout ouzh an douar da vont da fraost, da dachennoù-chaseal prevez pe da goadoù sapr. Rak an dour ivez a gas pinvidigezh: labouradeg Dour Menez Are e Kammanna, breserezh Coreff o tont en hevelep parrez a-benn bloaz. Raktresoù all a zo ivez war dachenn an evajoù: dour c'hoazh e parrezioù all met ivez chistr ha chug-frouazh. Klask sachañ tud er vro dre ar sevenadur, diorren anezhi war-du an dazont e-lec'h he lakaet en ur mirdi, ken ma teufe ur gouelec'h mat da nouspet "Rambo" ha "Mad-Maksed" all da ebatat. ■

Lan Tangi

KELAOUENN
Breizh gant ar mirdi

Kerenti berr
Gouelioù ha festoù noz
Stapu sonerezh, koroll, brezhoneg
Chomlec'h liou, lidoù, urz, berr, anez
Lizerezh nevez, sabbannet
Skol Uhel ar Vro

Kestler
e brezhoneg
hag e galleg

Kusil kestler deomp
r-99 87 69 12 faks 99 63 62 28

3615 KELA

Berr ha berr

Lakaet a ra saotrañ ar mor bigorn ruz-mouk da gemm reizh: en abeg da livoù kouch ar bigi, staeñ enno, e kresk ur bidenn d'ar vigornenn. War ziskar ez a poblañs al loen bihan da neuze.

Yalc'hadoù departamant Il-ha-Gwilen zo bet roet da sevel kleuzioù en-dro: 66 000 lur gall da sevel 7 kilometrad kleuz (184 km a zo bet yalc'hadet e 1992 gant an departamant).

Dourvêz e geunioù Dol, goude tri bloavezh a sechour. 12 000 devezh-arat a zouar uhel o ferzh e-keñver labour-dour a zo beuzet dindan dour-glav ha pri o tont eus ar mor, lec'h ma n'eo ket lusket ken gant ar bigi: bigi n'eus ket mui war an aod-mañ. Soñjal a ra d'an departamant prenañ ur vag a-razoñ da fourgasañ al lec'hid kuit eus ar skizioù stoufet ganti.

Evezhiet e vo ar saotrañ trenkennel e Gwened o kentañ ar plant man-kebell-touseg e pep karter, e-giz ma vez graet e Bro-Saoz a-bezh abaoe 20 vloaz.

Eus 14 e penn kentañ miz Kerzu eo tremenet da 17 niver ar c'humunioù danjerus an dour enno: re a nitrat 'zo e-barzh an dour bet kemeret digant ar Wilen pe ar Couesnon, en tu-all da 50 miligrammad en ul litrad, 60mg/l e Felger, 80mg/l en Argenton, en tu-all da 50mg/l er Morbihan evit 35 kumun, feurioù o kreskñ ingal e Penn-ar-Bed, lec'h ma vo savet un uzin dinitrataal war beg ar C'hap Sizun e 1993, ha 70mg/l e Hartignag ha Piriac.

Goullenn a ra ar gevredigezh "Dourioù ha Stêrioù Breizh" e teufe un dileuriad eus ministrerezh an endro da Vreizh, a-benn ensellañ al lec'h da vezañ adlodennet e Pielann-Veur, "lec'h-skouer meur a zagadennou-all", eme YG Pierre, Prezidant DHSB. Votet eo bet an adlodennañ war tost holl dachenn ar Meu, ur stêrig a red e-barzh koadoù dreist-holl. Ha gwec'h a zo krog da vezañ diskaret c'hoazh. J.L. Merrien, eus ar Re C'hlas, en deus ivez "douetañs war an evezhian bet kemennet gant kuzul Il-ha-Gwilen war al labourioù adlodennañ".

Graet ez eus bet "Brioiù da adchouiniñ" eus an Izenach hag aber an Trev, gant Ministrerezh an Endro: da lavaret eo e vo ret adstallañ parkeier ha koadoù war an div dachenn-se.

Beilhadeg gant Radio Breizh Izel



Fulup Kloareg, Sten Charbonneau ha J. Yves Mer gant brezhonegerien yaouank

Da geñver Emvod Meur ar gevredigezh Kanevedenn, Kreizenn Brezhonegerien Brest, d'an 28 a viz Du 1992, e oa bet aozet ur veilhadeg kaset en-dro gant Sten Charbonneau, eus Radio-Breizh-Izel. Berzh he doa graet ar veilhadeg-se he doa bodet kalzig a dud. Skignet e oa bet war-lerc'h war gwagennoù Radio-Breizh-Izel, e-kerzh an abadenñ "Ar Seizh Amzer". Diskouezet e oa bet e-giz-se e c'halled kaout oberezhioù sevenadurel a-stroll e brezhoneg en ur gêr vras evel Brest, o vodañ tud yaouank ha tud kozh, holl anezho brezhonegerien pe danvez-brezhonegerien an dazont ■

Medalenn a enor evit Lukian Raoul

D'an 11 a viz Kerzu 1992 oa bet kinniget ez-ofisiel "Geriadur ar skrivagnerien ha yezhourien vrezhonek" dirak ur bern tud, e lenni Sant Brieg. Medalenn a enor Kêr Sant Brieg a zo bet roet da Lukian Raoul evit e labour, gant Y. Dollo, kannad Aodou-an-Arvor ■



A-gleiz da zehou : Vefa de Bellaing, Lukian Raoul, Yves Dollo, Mariannig Moazan

Staj brezhoneg holl liveoù

e kreizenn Per Roy (Redon)

D'ar 6 ha 7 a viz C'hwevrer e Ti Kendalc'h. 5 live, 2 gelenner evit pep strollad. Dudi evit ar vugale. Skrivañ pe bellgomz da Nadine Quetier e SAE.

Klask a ra Dudi animatourien vrezhonegerien evit e greizzennoù e Roazhon, Sant Brieg ha Lannuon.

Ret eo d'an animatourien kaout ar BAFa pe kaout c'hoant da dremen an diplom-se.

Titour Skol An Emsav - kreizzennoù Dudi 8 Straed Hoche 35000 Roazhon ☎ 99.87.69.11 pe 99.38.75.83.

Tud Yaouank a Vreizh didostait da glevout...

Petra ?

C'hoant hor befe e Bremañ sevel ur gelaouenn evit ar re yaouank.

Pelec'h ?

Evel stagadenn d'ar gazetenn.

Gant piv ?

Ganeoc'h, evidoc'h-c'hwit hag a zo etre 7 ha 18 vloaz

Penaos ?

Kasit ho pennadoù, ho tresadennoù, ho farsadennoù deomp.

Pegoulz ?

Adalek miz Genver, da zont er-maez e penn-kentañ miz C'hwevrer. p.5 ho kazelen, bep miz e-barzh Bremañ !

Kinnig a ralo an Aotrou Frañsez Favereau "Geriadur Ar Brezhoneg a-Vremañ" nevez deuet er-maez (Embannadurioù Skol-Vreizh) e-kerz ur brezegenn-diviz a vo dalc'het er Greizenn Sevenadurel Roparz Hemon. D'ar Gwener 15 a viz Genver 1993 da 8e30 noz. Plasenn Verdun, Gwengamp.


Obererezhioù ar bloavezh 93 gant Breuriez Sant Erwan

Er-maez eus hor bodadegoù reoliek notennit war ho teiziatara :

-Emgav ar familhoù kristen (Emglev an Itegezhioù) : d'ar Sul 25 a viz Ebrel.

-Beaj da Vro-Skos evit ar c'hendalc'h keltiek en Inverness, gant ur strollad krennarded : e dibenn miz Gouhere.

- Kamp kalezik : eus ar sul 22 a viz Eost d'ar Sadorn 29.



A-led

I. Plegañ a ra ar gwez II. Annezad ur c'hevandir divent ; lakaet e voe da beurif. III. Kuzul Skozzell ; mont a ra en hent. IV. Din eo ; rann ur barrez ; rakger. V. Ar pezh n'oc'h ket VI. Tremen skuizh ; eus bezañ. VII. N'eo ket mui en hent ; da beñseliat, neuze. VIII. Led sinaat ; evit ar bigi da zont en aod. IX. Hen grit d'ho kazh ! rannig. X. En da ; lakaio da spontañ.

A-berzh

I. Gwel ur wazh er maezioù ez ae 2.E achantour pedet ; rakger ; stad.3.Nag a-raok an eur na gela ! ; mat da wiskañ panellou 'zo. 4. Ur Vari et-kaer. 5. Barvez evit al lodod ; kemerit ho ziv ! 6.Hini e dog n'eo ket pljus e welet a-berzh ; arsalthe. 7. (e) tezevello 8. Dindan al pezh. 9. Mar c'hoantait hen ober, chomit eus an heol ; muntr. 10. Da zegemer ar gweler ; adverb.

Kemennadenn

N'eo ket bet embannet Deiziataer 1993 gant Embannadurioù S.A.E., dre ziouer a archant. Klasket e vo kenembann hini 94 gant kevredigezhioù all, gwellaat an doare-kinnig ha stankaat an titour liesseurt a vo graet ivez.

Sonerien

O klask emaoamp strolladoù sonerien ha kanerien vreizhek (hengounel ha rock) evit abadennoù sonerezh e Bro Spagn. Skrivañ da Olga Gracia, Ilusionaria Musica, c/o Miguel Servet, 108-6°F, 50.013, Laragoza, SPAIN (Kas a-stroll gant ho lizher ur gasedig ha leullad ho strollad. trugarez).

Kanerezh

D'ar 16 a viz Genver e vo kanerezh en iliz Kommanna da 8e30 noz gant :
- Denez Prigent (gwerzhioù)
- Jean Yves Leroux (tonioù)
- Div ha daou (Pond)
- Isabelle Kidu (kan)
- Aurore Breger (telenn)
- Dominique Mahe (bombard)
- Georges Belz (ograoù)
Mont-tre : 35 lur (tommet vo an iliz)

Fest-noz gant Mir Run

Fest-Noz a vo e Plouber d'ar 16 a viz Genver 1993 -9noz. Gant Retrait de Permis ha Lintanf, Robin, Suignard, Morvan, Lehart. Sach'ig : Min Run a zo ur gevredigezh a ra war dro ar savadurioù e Plouber, an endro hag ivez festoù noz bep bloaz, kontadennoù...

Fest-deiz e Gwengamp

Fest-Deiz ar miz Kreizenn Sevenadurel "Roparz Hemon" (plasenn Verdun, Gwengamp) a vo aozet d'an 31 a viz Genver 1993, adalek 2e 1/2 goude kreisteiz. Kaset e vo ar fest-deiz da benn gant Ar ganerien : Texier-Rousvoal Ar Sonerien : Lahais-Darcel Paotr e akordeoñs : Philippe Ollivier Evel kustum e vo kafe, krampouezh hag evajoù fresk.

Fest-noz e Pabu

A-benn miz Gwengolo 1994 e vo digoret Eil Skolaj Diwan e Bro Wengamp (ar c'hentañ skolaj o vezañ digoret e 1988 e Brest). Sed aze un digarez kaer evit sevel ur fest-noz war an ton bras kement-mañ vo graet d'an 27/2/93 e Pabu (ekichen Gwengamp). Pedet 'vo evit kas an dañs en-dro :
- Diaouled Ar Menez
- Strobineil
- Suner GwAd
- Louarn-Thomas
- Guillou-Lestic
- Texier-Rousvoal
- Marius-Coadou
- Hag all...
War intrudu : Evit Eil Skolaj Diwan. Evit bezañ kelaouet : 96.35.90.05.

TAOLENN

BREMAÑ niv. 136
miz Genver 1993

Lizhiri	2
Yugoslavia	3
Brezhoneg, yezh ofisiel	4-5
Ul lezenn war wel	6
Taolioù-pluenn	7-8
Deskadurezh	9
Bro-Vigoudenn	10
Politikerezh	11
Armerzh	12
Sevenadur	13
Endro	14-15
Iwerzhon	16
Keleier berr Euskadi	17
Jules GROS	17
Berr ha berr	18-19
Mautig	20

Maketenn gant Lena Louarn ha J.M. Roynard.

Skoazell difaziañ gant Olier ar Mogn.

Pennadoù gant Hegareg, M.K., H. Scherb, Maodez Kombod, Philippe Lanoë, Iwan Kadored, Ti-kêr Sant-Brieg, APEEB, Elena Riou, Lan Tangi, Alan Heusaff, Mich Beyer, Olier ar Mogn, Lena Louarn.

Luchskudennoù gant J.M. Roynard, Yann-Lukaz, O.F., Lena Louarn, Enbata, Kanevedenn.

Tresadennoù gant Malo Louarn.

Renerezh BREMAÑ : Lena Louarn

Skrivit e-barzh BREMAÑ ! Kasit pep tra a-raok an 23 a viz Genver ! Trugarez deoc'h.

Ar pennadoù ne engouestant nemet ar re a sin anezho. An orinoù ne vezont ket restaolet.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,
8 ru Hoche,
35000 ROAZHON, BREIZH
☎ 99 38 75 83
faks 99 63 82 28.

Niverenn CPPAP 62974

MOUTIKAT MAGAZIN !

Setu deuet er-maez niverenn 0 ar magazin nevez evit ar vugale : **Moutig**. Un darvoud a-bouez ez eo evit meur a abeg. Da gentañ ne oa mui, siwazh, a gazetenn evit ar vugale. Ne oa ket tu da badout pell evel-se. Da eil ez eo anat d'an neb a daol ur sell ouzh ar magazin nevez ez eus bet graet ur c'hammed bras war-raok hag ez eus ganeomp bremañ ur magazin a-live gant levrioù An Here hag ar pep gwellañ eus ar pezh a vez graet evit ar vugale en Europa.

C'hoant hon eus bet da vont d'ober un nebeud goulennoù ouzh Moutig, ar c'hazh, evit gouzout hiroc'h.

Bremañ : *Ata, penaos e vez degemeret ho magazin gant an dud ?*

Moutig : Rouzmouzerezh...

Bremañ : *Ha plijet eo ar vugale ?*

Moutig : Hag ez int ! En em gavet eo bremañ va c'hazetenn gant holl vugale ar skolioù divyezhek. Kalz a goumanantoù zo distroet dija. Spi am eus e kendalc'ho evel-se. Tud nevez zo bet tizhet ivez, a-drugarez d'ar pennadoù zo bet er c'hazetennoù.

Bremañ : *Fiziañs ho peus neuze e teuio ho taol-arnod da vat ?*

Moutig : Mar kendalc'h an traoù evel bremañ ez eus tu da soñjal e vo gounezet ar bariadenn. Lavarit d'ho lennerien koumanantiñ buan avat. Piv'oar, ma vefen pinvidik a-walc'h e c'hallfen kreskiñ niver ar pajennoù ha lakaat c'hoarioù ouzhpenn em c'hazetenn !

Bremañ : *Just a-walc'h, petra eo ho kazetenn evit ar mare ?*

Moutig : 24 fajenn zo er magazin. 19 anezho a vo un azasadur brezhonek eus pennadoù deuet er-maez e Toboggan e-kerz an tri bloavezh diwezhañ. Gant Milan, un embanner eus Tolosa e vez embannet Toboggan ha kalz a vagazinoù all evit ar vugale. Ar pep gwellañ eus ar pezh a vez graet hiziv an deiz ez eo.

Ar pemp pajenn a chom a vo savet e Breizh gant Breizhiz. Ganet on-me e Breizh hag adkavet e vin bep miz war ar bajenn ziwezhañ. Ar peder fajenn a chom a roio bod d'ur gontadenn skeudennaouet. Degemeret mat e vo an holl ginnigoù, gant ma vint a-live gant peurrest ar gelaouenn : un danvez modern ha n'eo ket hepken kontadennoù kozh, skeudennoù plijus.

Kempouezet mat eo ar magazin a-hend-all, a bep seurt a gaver e-barzh : peadra da lenn, da c'hoari, da



PERAK E WELER
KEN NEBEUT A LOGOD
EN HOC'H ISTORIOÙ ?
HA GOUZOUT A RIT EO
FALL BUTUNIÑ EVIT
AR YEC'HED ?

zidroc'hañ, da zeskiñ, da geginañ, da c'hoarzhin... Ur magazin bev evit bugale hon amzer !

Bremañ : *Gant piv oc'h bet skoazellet, Moutig, evit lakaat ho kazetenn da zont er-maez ?*

Moutig : Un embanner dare da samañ ar riskl am eus kavet da gentañ : Skol An Emsav Kerne Izel ez eo. Arc'hant 'm eus bet digant Kumuniezh Europa, Skol-Uhel ar Vro ha Kengor Rannvro al Lizhiri. Evit ar pezh a sell ouzh an treiñ em eus bet ar chañs da gavout brezhonegerien a-youl-vat eus an dibab. Hag erfin ez on bet skoazellet

evit kenurzhañ al labour ha diluziañ kudennoù pleustrek gant Sekretouriezh Skol-Uhel ar Vro.

Bremañ : *Pegoulz hor bo tro da gaout un niverenn nevez ?*

Moutig : E miz Ebrel, amzer din da beurziazezañ va skipailh ha da gavout koumananterien a-walc'h.

Bremañ : *Petra c'heller ober evit ho skoazellañ, Moutig ?*

Moutig : Koumanantiñ ar buanañ ar gwellañ ha lakaat tud all da anavezout ar magazin. Gouest on da gas skwerrennoù d'ar re a c'houlennno, evit reiñ lañs d'am c'hazetenn.

MOUTIG

Koumanant-bloaz 160 lur, koumanant-skoazell 200 lur
chekenn da vezañ kaset da :

Skol An Emsav Kerne Izel 16 Straed Paul Borossi 29000 Kemper